

PEDENNOU EVID
AN ARVEST

Kavet e vo kalz pedennou e leorig Yeun ar Go “Pedennou evid eun noz-veill gand eun dén maro” (1953). Amañ da heul, ne vo nemed eun nebeud menoziou evid eur veilladeg verr, hag eun droidigez euz eur veilladeg tennet euz al leorig “Prières pour les défunts à la maison”.

EUR VEILLADEG VERR

EVID KREGI

Setu ni dastumet amañ, evid beilla gand A..., Doue e bardono (he fardono), hag evid pedi. Goulou a zo war elum ; ar skeudenn int euz or feiz : ni a gréd n’eo ket echu buez an dén tremenet, med cheñchet nemet-kén. Kroaz ha chapeled a zo gand an dén maro : diskouez a reont ar fiziañs e-neus bet en Aotrou Krist hag er Werhez benniget.

Chomom bremañ sioul ha devot di-rag mister braz ar maro ha di-rag kañv ha glahar ar gerent a zo amañ, evid ma vo on noz-veill eun akt a feiz hag eur bedenn.

Kemerom or chapeled ha lavarom anezañ en eur zoñjal e komzou or Zalver ha kelennadurez an Iliz.

AR CHAPELED EVID AN DEN TREMENET

1 Dizénez kenta

An hini a zo aze dirazom astennet war ar varv - skaon, a zeuio adarre da veo. N’eo ket eur fin eo ar maro, med eur gortoz ; eun devez, ni en em gavo adarre asamblez.

Aviel Jezuz-Krist hervez sant Yann 11. 18-27.

(pajenn 96)

2 Eil dizénez

Ni a bedo evid kerent ha mignoned an dén tremenet, evid ma teuio Doue d'o frealzi ha d'o c'hennerza e-kreiz o glahar.

Aviel Jezuz-Krist hervez sant Yann 13. 1 ; 14. 1, 27

Jezuz, o c'houzoud e oa deuet evitañ an eur da dremen euz ar béd-mañ daved e Dad, Eñ hag e-noa karet e dud hag a oa er béd, o c'haras beteg penn.

Na lezit ket ho kalon da veza strafuilliet. Kredi a rit e Doue ; kredit ennon-me ivez.

Ar peoc'h a lezan ganeoc'h, va feoc'h a roan deoc'h. N'eo ket evel ma ro ar béd eo her roan deoc'h. Na strafuill, nag aon eta en ho kalon.

3 Teirved dizénez

An dizénez-mañ a livirim en eur zoñjal er baradoz ; eno ema dija, fiziañs on-eus, an dén a zo e gorr amañ hag a ouelom dezañ. An Aotrou Doue a zo mad dreist péb madèlèz. N'eo ket war or pehejou hep-kén eo e teu d'or barn, na war an nebeud a boan on-eus kemeret evid e zervicha : ne zelaou nemed mouez e drugarez.

Aviel Jezuz-Krist hervez sant Yann 14. 2-3

E ti va Zad ez eus meur a zemeurañs. Ma ne vije ket bet evel-se, daoust ha lavaret am-bije deoc'h edon o vond da bourchas deoc'h eur plas ? Ha pa 'vin eet d'e bourchas deoc'h, me a zeuio en-dro d'ho kemer ganin, evid ma vezoc'h, c'hwi ive, el lec'h m'emaon-me.

4 Pederved dizénez

Gouzoud a reom e chom di-rag porz ar baradoz an eneou o-deus ezomm da veza dizaotret. Kredi

a reom e c'hell or pedennou sikour an Anaon. Evid an Anaon-ze ha, dreist-oll, evid ene an dén tremenet emaoom o veilla gantañ hirio, emaoom o vond da lavared an dizénez-mañ.

“Ho pet soñj euz or breudeur eet da anaon, gand an esperañs da zavel a varo da veo hag euz an oll dud tremenet. Roit dezo ar joa da weled sklêri-jenn ho tal en ho paradoz.”

5 Pempved dizénez

En on touez ez eus tud a béb oad ; da béb oad e varver, ha n'eo ket diouz tro ez eer.

Or Zalver a lavar deom beza prest dalc'h-mad. Evel Jezuz, lakaom on ene, en avañs, etre daouarn an Aotrou Doue.

Sellom gand fiziañs ouz ar Werhez Vari, eet evid atao e gloar an neñvou, ha goulennom diganti, e-pad an dizénez-mañ, beilla warnom, beza en or c'hichenn d'an eur euz or maro ha digeri deom dor ar baradoz.

PEDENNOU

Goude ar chapeled, e vefe mad lenn Aviel an Eürusted, Maze 5. 1-12, pajenn 247. Ha kana kantik ar baradoz. Evid echui, setu amañ eun nebeud pedennou da zibab.

- 1 Me ho salud, Mari, merc'h da Zoue an Tad,
 Me ho salud, Mari, mamm da Zoue ar Mab,
 Me ho salud, Mari, pried ar Spered Santel,
 Me ho salud, Mari, templ an Dreinded Sakr,
 Me ho salud, Mari, esperañs ar béd,
 Me ho salud, Mari, leun a zouster hag a drugarez

O Mamm Doue, leun a enor, on distlabézit diouz ar pehejou hag ar c'hleñvejou diremed. O Gwerhez Vari, or rouanez, c'hwï hag a zo leun a vadèlèz, plijet ganeoc'h alvokadi evid silvidigez

pép-hini ahanom. O Mamm dener or Zalver, anvet ar Vamm a drugarez, c'hwi hag a zo bet dibabet e-touez an oll gwiragez evid lakaad Jezuz, on Aotrou, war an douar, bezit on difennourez di-rag Doue ! Braz eo ho karantez en or c'heñver, o Mari, mamm a druez ! Na nahit ket reseo ene an hini tremenet-mañ : deuit d'hen degemeret e-touez an niver braz euz ho servicherien.

2 Pedom santez Anna, mamm garantezuz ar Werhez Vari, ha mamm-goz Jezuz-Krist on Aotrou, ma plijo ganti pedi he mab bian benniget da rei e bardon da ene an hini tremenet-mañ ha da skuill e c'hrasou war bép-hini ahanom.

3 Pedom Mab unganet an Tad eternal e-neus kemennet evidom hent ar zilvidigez dre e vuez, e varo, hag o sevel leun a c'hloar, euz a varo da veo.

Me a erbéd ouzoc'h, va Doue, hag hoc'h asped da zigemeret, etre divrec'h ar Zalver, ene an hini tremenet-mañ ho-peus bet ar vadèlèz da ziskenn evitañ war an douar.

Anzavit, va Aotrou, ho krouadur ; ganeoc'h hoc'h-unan eo bet krouet, c'hwi hag a zo ar gwir Doue beo, rag n'eus nikun all e-béd hag a c'hellfe ober ar péz a rit. Plijet ganeoc'h eta, or gwir Aotrou, karga dirazoc'h ene an hini tremenet-mañ a levez, evid ma 'z ay bremañ d'ho kweled war ho tron a c'hloar, ma paro e zaoulagad warnoc'h ha ma c'hello hoc'h adori da viken gand an oll sperejou eüruz.

EUR VEILLADEG ALL

EVID DIGERI

Kerent, mignoned hag amezeien, setu ni bodet tro-dro da A... e-neus (he-deus) kuiteet ahanom. Deuet om da lavared d'e dud (d'he zud) or mignoniaj ha da gemered perz en o glahar. Bodet om ive evid pedi, ha lavared or feiz hag on esperañs a gristenien di-rag ar maro.

Bezom soñj euz komzou Jezuz :

“Me eo an Adsao da veo hag ar vuez ; an néb a gréd ennon— ha pa ve marvet— a vevo. Ha kement hini a vev hag a gréd ennon, sur ne varvo ket da viken.”

Gand doujañs ha fiziañs, lakom A... etre daouarn an Aotrou Doue. Ra zigemero anezañ (anezi) en e levenez hag en e beoc'h.

Pedom sioul :

Goude eur mare a bedenn zioul, lavared :

Salver Jezuz, prometet ho-peus e vefec'h e-kreiz ar re a vefe bodet en hoc'h Ano : war-zu ennoc'h e teuom gand fiziañs. E penn kenta ar veilladeg-mañ, e fell deom lavared gand feiz ar bedenn ho-peus desket deom, pedenn oll vugale Doue :

**“On Tad hag a zo en neñv,
Hoc'h Ano bezet santelleet...”**

DI-RAG ON DAOULAGAD, AR SKLERIJENN

“Me eo sklêrijenn ar béd, eme Jezuz. An hini a zeuio d'am heul ne gerzo ket en deñvalijenn, med bez' e-no sklêrijenn ar vuez.”

Da zeiz e vadeziant (he badeziant) eo bet roet da

A... eur c'houlaouenn enaouet ouz goulou-Pask, da zisklêria e vefe sklêrijennet gand ar C'hrist. Setu amañ ar péz a zo bet lavaret dezañ (dezi) en deiz-se :

“Resevit sklêrijenn an Aotrou Krist. Dalhit anezi war elum. Sklêrijennet gand Jezuz-Krist, kerzit be-préd er vuez evel eur bugel a sklêrijenn ; chomit stard er feiz, hag e c'helloc'h mond da ziambroug or Zalver, pa zeuio en e Rouantèlèz, a-unan gand oll zent ar baradoz.”

Bremañ e teu da wir evid A... an emgav gand or Zalver. Ablamour da ze, eo enaouet en e gichenn (en he c'hichenn) goulaouenn e vadeziant (he badeziant).

Amañ e c'hellfed kana en enor d'ar C'hrist-sklêrijenn, da skwér :

“Sklêrijenn gaer an Aotrou Doue a zo skuillet divuzul dre ar béd a-bez.”

Salver Jezuz-Krist, ra zeuio ho sklêrijenn da sklêrijenna on hent war-zu on Tad. Ra zikouro ahanom da vale gand esperañs, esperañs bugale Doue galvet ganeoc'h d'ar vuez. Hag ar peoc'h a reno en or c'halonou, a oll-viskoaz da virviken.

R/ Amen.

GOULENNOM PARDON DOUE

Buannoc'h e welom techou fall ar re all e-géd o ferziou mad. Ha koulskoude :

— Piou ahanom n'e-neus netra d'en em rebech ? En or buez a famill..., war on labour..., en or c'homzou pe on doareou da ober ?

— Piou ahanom a gredfe lavared e-neus roet be-préd kement a c'heded outañ ?

— Piou ahanom a zo héb pehed ?

**Ya, goulennom digand an Aotrou selled gand madèlèz ouz or buez hag ouz hini A...
Goulennom digantañ pardoni deom.**

*Amañ e c'hellfed kana "Ma c'houlennan diskuiz",
pe "Euz goueled an toull don" (Salm 129) pe
c'hoaz 'goulenn-pardon' an overenn "Aotrou Doue
ho pet truez".*

Pedom

Aotrou Doue, n'ankounac'hait ket ar péz ez oc'h evid ho re : eun tad, a blij dezañ pardoni ; eur mignon ha ne zerr biken e galon. Or selaouit, pa bedom evid A... nevez eet da anaon. Resevit anezañ (anezi) en ho ti, er plas ho-peus prepalet evitañ (eviti). Digorit dezañ (dezi) ho tivrec'h ma tañvo an eürusted a bado da viken. Dre Jezuz-Krist, or Zalver. R/ Amen.

TRUGAREKAOM AN AOTROU DOUE

Daoust d'ar pehed, ez eus, e kalon péb dén, eun ezomm a sklêrijenn hag a wirionez... eur zehed a justis hag a garantez... ar c'hoant da veza mad ha fidel... Bez' e c'hellom eta, en abardaez-mañ, trugarekaad an Aotrou Doue evid an oll binvidigeziou on-eus bevet ha rannet war an douar-mañ, gand A... Rag n'eo kollet netra anezo.

Ar bedenn a zeu amañ war-lerc'h a skofe muioc'h ma vefe degaset da zoñj euz komzou, doareou-ober, jestrou, boaziou, troiou-spered an hini a zo eet da anaon.

Da bép-hini euz an eñvoriou, respontom :

R/ : Meuleudi deoc'h, Aotrou Doue.

• Evid ar galon a lakee da ober e labouriou pem-dezieg... R/

- Evid an evez a ziskoueze d'ar re m'en em gave ganto, hag ar boan a gemere da rei eürusted d'ar re a gare... R/
- Evid ar justis a zifenne hag ar peoc'h a glaske sevel... R/
- Evid ar skiant e-noa (he-doa) da c'houzoud beteg pe-lec'h 'oa gouest da vond, hag e (he) youl da ober atao gwelloc'h... R/
- Evid al lod a eürusted hag a levenez e-neus (he-deus) bet war an douar-mañ... R/
- Evid e (he) lealded d'ar mareou a arvar... R/

Goude eur pennadig sioul :

Doue oll-vad, c'hwi on Doue !

Hirio zo-kén —e-kreiz or c'hañv—

**e fell deom ho meuli hag ho trugarekaad
evid an oll zonezonou he-deus ho karantez**

lakeet da skedi a-héd buez A...

**Peo-gwir eo fellet deoc'h e (he) lemel diganeom,
hag en-desped d'or glahar,**

**ni ho meul ablamour m'eo echu hiviziken evitañ (eviti)
péb poan ha péb dalc'h.**

En tu all d'ar maro zo-kén ez eo tremenet.

Ra yelo bremañ el levenez hag er peoc'h

**m'ema enno ho mignoned evid ar c'hantvejou a gantve-
jou !**

LAVAROM ON ESPERANS HAG OR FEIZ

**Pa zeblant deom ez om dilezet da vad, p'on-eus poan o
kompren, aspedom asamblez or Zalver.**

Da béb goulenn e respontom :

R/ Salver Jezuz, kreskit ennom ar feiz !

• C'hwi hag a zo marvet evidom, hag a zo roet
deoc'h péb galloud war ar maro... R/

• C'hwi hag a zo an “Adsao hag ar Vuez”, hag
ho-peus komzou ar vuez peurbaduz... R/

- C’hwil hag a zo ar sklêrijenn evid ar re a gerz en deñvalijenn, hag an nerz evid ar re a goll kalon... R/
- C’hwil hag a gavom ennoc’h tro da gompren on amproennou, hag a zigor or c’halonou d’an esperañs... R/
- C’hwil hag a lavar deom eo ho karantez trec’h d’ar maro... R/

Chomit ganeom, Aotrou,
d’an eur-mañ p’emaom er riskl, di-rag ar maro,
da gaoud douetañs euz ar vuez.

Grit ma talhim beo an eñvor euz A...,
gand an esperañs d’en em gaoud asamblez adarre
en ho kichenn hag e-kichenn an Tad,
a-unan gand ar Spered Glan,
bremañ hag er c’hantvejou a gantvejou !

HA BREMAN, SELAOUOM KOMZOU DOUE

Or feiz hag on esperañs a gristenien a zo gwriziennet
war Kelou Mad Jezuz : an Aviel.
Digorom eta or c’halonou hag on diskouarn da Gomz
Doue.

(Kana, pe lavared, a c’heller unan euz an diskanou-mañ) :

*“Va fiziañs a lakan en Aotrou va Doue :
fiziod ’ra va ene stard en e bromesa.”*

“Ra zeuio ho Komz da vaga or feiz.”

E pe-lec’h ema an eürusted wirion ? Jezuz hen lavar
deom. Selaouom Lezenn an Eürusted.

Aviel Jezuz-Krist hervez sant Vaze

5, 1-12

O weled ar bern dud, e pignas Jezuz war ar menez ; pa
oe azezet, e teuas davetañ e ziskibien. Hag eñ da gomz

ha da gelell anezo o lavared :

“Eüruz an dud paour a galon, rag dezo eo Rouantèlèz Doue..

Eüruz an dud êz, rag an Douar a vo o lod-hêrez.

Eüruz an dud a ouel, rag frealzet e vint.

Eüruz an dud o-deus naon ha sched euz ar justis, rag maget e vezint.

Eüruz an dud truezuz, rag truez e kavint.

Eüruz an dud glan a galon, rag Doue a welint.

Eüruz an dud a laka peoc’h, rag anvet e vint bugale Doue.

Eüruz an dud gwall-gaset ablamour d’ar justis, rag dezo eo Rouantèlèz Doue.

Eüruz oc’h-c’hwï pa zeu an dud da zismegañsi ha da wall-gas ahanoc’h ha da lavared gaou ha bép seurt droug eneb deoc’h ablamour din-me : bezit laouen ha tridit a levez, rag govr kaer ho-po en neñvou”.

Setu an hent d’an eürusted disklêriet deom gand Jezuz. Eun eürusted ha n’eo ket hep-kén evid war-c’hoaz : bez’ ema en or galloud, ma karom, beza eüruz gand ar C’hrist, dious-tu ; beva euz e eürusted dezañ, hag a zo kared, rei, rei or buez, en em rei. Daoust ha n’eo ket ar péz a lavarom pa ganom :

(Lavared ar c’homzou da genta) :

*Jezuz pegen braz ve plijadur an ene
Pa vez e gras Doue hag en e garante !*

A-raog ar poz kenta, lavared :

“Ar poaniou a-vremañ, a lavar deom sant Paol, a zo nebeud a dra e-skoaz ar c’hloar a dle beza diskuliet ennom.”

*Berr ’kavan an amzer, hag ar poaniou dister,
O soñjal deiz ha noz e gloar ar baradoz.*

A-raog kana ar poz war-lerc’h, lavared :

“Evidom-ni, a lavar c’hoaz an Abostol, or gwir-vro a zo en neñvou. N’on-eus, war an douar-mañ, kêr e-béd hag

a badfe. Emaom evel en harlu, pell diouz an Aotrou.”

*Pa zellan en neñvou, etrezeg va gwir vro,
Nijal di a garfen, evel eur goulmig wenn.*

A-raog kana ar poz war-lerc’h, lavared :

“Eüruz an dén a jom feal a-dreuz an trubuillou. Bez’ e-no kurunenn ar vuez, prometet gand Doue d’ar re o-deus karantez evitañ.”

*Me a welo Jezuz, en eur c’hiz dudiuz,
O lakaad war va fenn eur gaer a gurunenn.*

A-raog kana ar poz war-lerc’h, lavared :

“Deus, servicher mad ha feal. Deus da gemer perz e levenez da vestr.”

Ra blijo d’an Aotrou rei da glevet hirio ar c’homzou-se da A...

*Pegen brao ’vo klevet Jezuz o lavared :
Deut, va zervicher mad, da gaoud Doue ho Tad !*

TROOM BREMAN WAR-ZU MARI, OR MAMM

Mari a oar petra eo koll unan karet. Kompren a ra or poan.

Ra blijo ganti on derhel stard en esperañs, hi hag a zo chomet en he sav, e-kichenn kroaz he Mab.

Ra lako tro-dro deom evez ar vamm m’eo evidom.

“Mari, Mamm da Zoue hag or Mamm, pedit evidom...

Pedit evidom bremañ...

Pedit evidom da eur or maro...”

Oll asamblez, lavarom eun dizénez euz ar chapeled.

Pa vez echu, e c’heller kana an diskan (hel lavared a-raog) :

*O Mamm a garante, pedit 'vidom, pedet !
Ni 'zo ho pugale, ha c'hwi or Mamm garet !*

Pedom c'hoaz an Itron Varia : goude péb galv, e respontom :

R'ho-pezo evitañ (eviti) an diskuiz peurbaduz.

**Mamm, c'hwi hag a anavez ahanom...
Mamm, c'hwi hag a zelaou ahanom...
Mamm, bet treuzet ho kalon...
Mamm ar re 'zo er boan...
Mamm bet e-tal ar groaz...
Gwerhez ken izel a galon...
Esperañs ar re wasket...
Eienenn an oll c'hrasou...
Frealz ar c'halonou gloazet...
Mamm dener an dud keiz...**

E-lec'h dibuna an oll galvou-ze diouz reñk, e c'hellfed kemered unan anezo goude péb "Ni ho salud Mari" euz an dizénez chapeled.

Kemer a c'heller ive, e-lec'h ar galvou-ze, ar c'hantik (Nn73) :

Ni ho salud, Rouanez an Elez.

PEDENN EVID AN OLL

Gand fiziañs, pedom Doue on Tad evid A... hag an oll dud o-deus kuiteet ar béd-mañ.

Diskan : Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

• Evid A... hag e-neus (he-deus) nevez kuiteet ahanom. Roit dezañ (dezi) gopr e vuez (he buez) war an douar-mañ, eur vuez a gerentiez hag a vignoniez, a labour hag a vadèlèz evid ar re all.

A-greiz-kalon, ni ho péd !

• Evid an oll re o-deus da c'houzañv diwar e varo (he maro) ; hag ar re o-deus poan dre m'emañt o-unan.
Grit ma kavint en o hent unan bennag d'o skoazella.
A-greiz-kalon, ni ho péd !

• Evid ar glañvourien pell diouz o zud, hag er riskl d'en em gloza warno o-unan ; hag evid ar re a lak o foan d'o zervicha...
Deskit deom, Aotrou, en em zantoud muioc'h e karg euz eürusted ar re all.
A-greiz-kalon, ni ho péd !

• Evidom oll, bodet amañ :
Lakit da greski ennom, Aotrou Doue, ar feiz, an espe-
rañs hag ar garantez, evid ma vezim oll, eun deiz, una-
net e peoc'h ho rouantèlèz.
A-greiz-kalon, ni ho péd !

Ma roit ar vuez d'an dud, Aotrou,
N'eo ket evid ma varvint da viken.
Ma roit dezo ar c'hoant da veza eüruz,
Ez eo ablamour m'int galvet d'an eürusted.
Ho pedi a reom eta gand fiziañs
Evid an oll re o-deus kimiadet diouzom.
Roit dezo degemer en ho rouantèlèz-c'hwi,
M'o-dezo perz da viken
E levenez ar C'hrist adsavet da veo.

Bez' e c'heller echui ar bedenn gand diskan ar c'hantik :

*Ni ho salud, Steredenn-vor,
Mamm da Zoue leun a enor,
Gwerhez be-préd dor an neñvou,
Selaouit mad or pedennou.
Ave, Maris Stella, Dei Mater alma.*